



# KLOAREK KOAT AR RANNOU

A

PENN-HERES KERZANTON



War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia Remengol.*

**Karantez ha glae'har :**

1.

Tud iaouanq a Vreiz-Izel, didostaît da glevet  
Ar recit eus va daëliou ho va foaniou kalet :  
Me zo eur kloarek iaouank a eskopti Quemper  
Am boa choaset eur vestrez en eskopti Treguer.

A c'hars ar mor oun ganet en bro sant Gwenole,  
Ha biscoas nemet glac'hар nem eus bet em bue ;  
*Glac'hар a guir garantez*, setu va flaneden,  
Planeden rust a kalet da heuilla pen-da-ben.

Pa oan em bugaleac'h, va vam baour aliez  
A lavare din : « Va mab gar a ped ar Werc'bez,  
« Pèd anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,  
« Mar e fedez a galon, biquen ne ni da goll. »

Patronez ma mam dener, Gwerc'hez vad Remengol,  
Ped gweach oc'h eus hu miret da doun me eat da goll !  
He peded am eus bepred, breman, arog mervel,  
E kanin ho meulodi d'am breudeur Breiz-Izel.

Pa guimiadiz deoc'h va zud, da ziz pell euz ar guer,  
Evit mont var ar studi en kollach Landreguer  
M'em boa nemet pemzek vloas, me a wele dourek,  
Rac evidon ne oa ken ; allas!... a eurusted!...

## — 2 —

O tostaat oc'h Landreguer e kavis eur plac'hik ;  
 Koant evel eun ælik Doue, he hanno oa Metik  
 D'ar gouent a ze ive, doun d'ar studi,  
 He c'halonic oa mantret kemet a va hini.

« Salut deoc'h plac'h yaouank, a lavariz dez-hi,  
 « Evel d'oun oc'h ankeniet o kuitad tud ho ti,  
 « Ho tornik flor em dornik laquet gant karantez,  
 « Hac sesimp eureussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hik a lavaras : « O kloarec Gwenole,  
 « Pedomp Doue alies an eil evit eguile,  
 « Er joa koulz hag en anken dalc'hit sonj a Vetik  
 « Euz a vreman da viken e ho mestrezik.

« — O Metik va c'harantez rozen gaér Breiz-Izel !  
 « War ho mignon Gwenole tolet breman eur zell,  
 « Eur zell digant ho lagat a rai eurusted  
 « Keit a ma lezo Doue ac'hanon war ar bed. »

Eru en kaér Landreguer, eru e pen hon hent,  
 Me eo kasset d'ar golach ha Metik d'ar gouent ;  
 Ann disparti oa kalet e hue o hag ankeniuz,  
 Ann eurusted er bed-man n'eo ket paduz !...

Dre ma chomiz er kolach skeuden dous Metik kez,  
 Eun deis, eun nos diaison he deue aliez,  
 Neuze peden Doue ha Sent koz Breiz-Izel,  
 Vit ma vige en e buez, laouen euvreuz, santel.

## II.

Pa eo achu va studi en hiz da Remengoll,  
 Da bedi c'hoas evit hi Gwerc'hez-vad *Remed-oll*,  
 Seiz tro a riz d'an oter, devez ar pardoun bras.  
 Ha seiz tro d'an iliz zakr war ben ma zaoulin noaz.

Goude an offeren-bred, o pebeuz levenez !...  
 Er vered, gant e man ger, e velis Metik kez  
 Laouen eo evel an deiz, ha coant evel al loar,  
 Bicoaz penn herez ken koant n'euz bet war an douar.

Lugerni a re he zall, he diou chod gwen a ru,  
 He gue novel eur rozen, he bleo, he lagad du,

## — 3 —

Eur groas aour en he c'herc'hen, e c'hoef dantelezet  
Lavaret vije eun aell euz an èv diskennet.

« O pebeus joa evidomp va c'hloarec Gwenole,  
« En em gaout en Remengol deis pardon mam Doue,  
« Mam an oll dud ankeniet, Gwenole, ma mignon,  
« Evidomp e pep amzer he fediz a galon.

« — Metik koant, setu aman, eur voalen aour,  
« A roas din araog meravel Annaïk va mam baour,  
« Dong anezi var da viz, kemer hi digant en,  
« Me dou war goalen ma mam d'ez karet da viken

« — Ar groas aour zo em c'herc'hen a vo dit Gwenole  
« Eur guchen euz va bleo a roan did ive :  
« War ar groas e touan a dirac ar Werc'hes  
« E vi karet gant Metik, 'tre ma vo en bue. »

Ha daoulinet en iliz, hon deuz gred eur beden,  
A roet evit offrant, eur c'houris koar melen,  
Beniguet ho medalen, poket da relegou,  
Da relegou Sant-Breiz karet gant ho tadou.

Goude hon euz baleet hon daou da Breiz-Izel,  
Ha gouelet kalz ilizou : kalz a douriou huel,  
Abatti Landevennec, hag en Douarnenez,  
Lec'h ma oa Kaer-Is hag ar Brinces Ahèz.

Gwelet hon euz Mene-Hom, hag ilis veur Quemper  
Mene-Bre, iliz Bulat hag hini Landreguer,  
Kastel-Brest, Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaün ar Foll  
Ha kaera tour zo er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Kaer Ahès, Kemperle, Pont-n'Abat,  
Fouesnan, bro ar merc'het koant, Gwengamp hag Huelgoad  
Montroulez ha Lan-Huon, Kroson a Lez-n'Even,  
Callak, bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden.

Klevet hon euz e krosal ar mor beg a Raz,  
Biskoaz den naentremenaz eb santout aoun pe c'hlas.  
Bet omp en ene Sizun , en Roueseaz, Molenez,  
En enez Vaz, er Ieodet, ive er Seiz-Enez.

## — 4 —

**Eur blavet omp bet euruz evel eal Doue,  
A setu lec'h pa ho guelet, an oll a lavaret :  
« Setu kloarek a Rannou, soul evel eur serven,  
« Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rosen.»**

**III.**

**Devez pardon Sant-Herbot, e klevis eur c'helou,  
En euz beuzet ma c'halon eu eur mor a zaelou,  
Gant e zad ha gant e mam, d'am mestrezik Metik,  
E oa choased da bried eur Pagan pinvidic.**

**Ar pagant-se oa diot hep furnez, hep skiant,  
Ne gare war an douar nemet ar gwin-ardent ;  
Metik paour, pa e gwelet a grene gant ankrez ;  
Hoguen, he zad oa dallet allas ? gant e danvez !**

**Mont a riz prim da gwelet neuze da Gerzanton,  
Dre ma tostaen, em c'breiz a grene ma c'halon ;  
War darchen ar bourg e son e oa ar biniou,  
Tud an eured a Metik beusset en he daelou.**

**Metik, a dreuz e daëlou a reaz ouzin eur zel  
En eur lavaret *kouraj, mignon fidel !*  
Monet a ra en iliz, lavaret ra d'ar belek :  
*Guenole eo a garan hag hen vo va fried !***

**Koueba raze d'an douar ractal ar ben-herez,  
Ha douguet eo dioc'h tu euz an iliz er mez ;  
Dispak e c'hoef, he dillat, a dispak e bleo :  
Seblautout a ra beza eun elik paour maro.**

**Mantret oll gant a glac'har e kouezit d'an daoulin,  
En eur grial : O Metik zell a druez ouzin ?  
Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod, d'he c'herc'hen !  
*O ! Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garan !***

**An disesper e dro d'in, evel eur vantel blom,  
A chassas pell ac'hanon, pell war zu Mene-Hom,  
Va skiant a zo kollet, va kalon a zo ien,  
*O ! Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !***

**Eiz-de goude, aset e kreiz koat a Rannou,  
War va diou chod a red diou feunteun a zaëlou.**

— 5 —

**Pa glevis e Rmengol o zon anter-noz,**  
**E lavaris esklamet : « Va Doue d'eoc'h bennoz.**

« O Gwerc'hes vad Rumengol, sellit ouz va glac'har,  
 « Aman oun deud da vervel breman war ho touar ;  
 « Varc'hoaz, pa zavo an heol, arc'hentet an envou,  
 « Didan an derven goz me a cavet maro!!!

« O Metik, va douzik koant, p'hini a garien,  
 « Kenavo larant dit er bed man da viken,  
 « Gant ar maro unanet, ni c'hoas en em garo.  
 « Kenavo er barados, kenavo !!!....

#### IV.

**An de varlec'h da zav eol, eun durzunel hep par,**  
**A hirvoude en derven he c'hlemou a glac'har :**  
**Ar c'hloarek a oa maro gant an anken,**  
**En eur lavaret *Metik ! te p'hini a garien !***

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas var e vuzellou  
 Kroas aour ha bleo du Metik glebiet gant e zaëlou,  
 War an derven doa skrivet hano e garante,  
 Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'hleve...

Kasset oa bet ar c'hloarek da vered Rumengol.  
 Pa sebeliet e dishoet iliz zakr *Remed oll*  
 Iliz patronnez he vam en deuz bet ken karet,  
 Tud iaouanq a Vreiz-Izel, pedit vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en e wele douar !!!  
 Eur miz goude oe klevet huanadou glac'har...  
 Eur plac'hik gwisket en du en bered Remengol,  
 Deut di pa bedi Doue ha Guerc'hes Remed-oill.

O tremen dre ar vered, velas var eun men be,  
 Skrifet neve flamim hanou he mignon Gwenole,  
 Epad an nos droulinnet, Metik, wele dourek,  
 Ha d'ar men-be e poke, e poke kaloneq.

« O Gwenole, emezi setu te en repos,  
 « En douar zakr Rumengol ez out deut d'am gortoz.  
 « Mes ken ma starzo ann de, o ma muia karet,  
 « Er be-man, dre zorn Doue, ni vezoz unanet !!!

## — 6 —

**Da zav-heol, eur belek kos, vont da bedi Doue,**  
**He c'havas anter varo, gourveet war ar men-he :**  
**Reï a raz d'ar plac'hik paour absolven a pardon,**  
**Metik a varvas laouen, raktal, gant ran-kalon !...**

**En eur vogen ezans ene gwen Metik kez,**  
**Vel eur goulmik a nijas d'ann ev gant ann ælez :**  
**Euz a Varados Doue eur goabren arc'hantet,**  
**War tour iliz Remengol, neuze zo diskennet.**

**War ar goabren ar Werc'hes ha Sent-kos Breiz-Izel**  
**Deus kurunen Gwenole, hac e vestres santel ;**  
**Barzet an amzer gwechal, drant, war e sollennou**  
**Da Zoue, en brezonnek, e gane ho gwersiou.**

**Sebeliet he korf Metik, kichen koat Gwenole,**  
**Ar maro deuz unanet an eil gant eguielle,**  
**Eur c'hloarek karantezuz deus war o be skrivet,**  
**Ar c'homzo truezus man, gant e zaelou merket:**

« *Aman repos en peo'h kloarec Koat ar Rannou,*  
 « *Den a feiz hag a galon, den a garie e vro ;*  
 « *En e gichen eo kousket penn-herez Kersanton,*  
 « *Metik an elik Doue maro gant rann galon !!!*

**O Gwerc'hes mad Remengol, setu o taou buguel**  
**Kousket en tall oc'h ilis ha dindan ho askel ;**  
**Vel eur vam karantezuz war gavel e mabik ;**  
**C'houi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!**

**Cleier, ogrou Remengol ,truezuz c'houi sono ;**  
**Barset ha pelerinet, daelou c'hui a skuillo,**  
**War be Metik Gwenole, pa refet ho peden,**  
**Eur beden a garantez ha carguet a anken ?**

**Bevit e doujans Doue, tud yaouanq Breiz-Izel,**  
**Pedit Gwerc'hes Remengol ,evit ma viot santel;**  
**Sonjit ive e Metik, sonjit en Gwenole.**  
**Bezit evel - the fidel an eil d'eguile.**

Koat ar Rannou (Rann, Rannou, chants, série) *bois des chants et des séries*. Koat Bras e dero, ezo en kichen ha d'ar zav-heol da

## — 7 —

illis Remengol. An Drouizet, beleien, ar Vretonnet gwechal c'hoas, difeiza drec'he, bep bloas, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eur louzouen, hanvet *huel var p'hini* a zav war an dero.

Barz, barz ( Barde-poète ) bep bloaz ive en em gave e koat a Rannou hag e *Rumengoulou* hiriou hanvet Remengol, barzet ann Arvor. A re-ma oa tud a skiant pere a gane gwerziou great gant-he war an traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meulodi Teutatès doue faoz, pelini voa enoret elec'h man breman Iliz Remengol. D'ae hini vije hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, war p'hini a Barz a ganc e zoniou.

Gwenclan Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent ma teuaz en hini ar feiz kristen — Breman zo c'hoaz e Breiz kals Barzet, pere a'laka o studi hag o foan evit kenderc'hel en hon touez ar feiz ha iez ho bro. En pen kenta eus ar barzet e man an aoutronez Kermarker, bas Breiz ; an abad Herri, barz an Aviel ; Troudec, bar zar Vugalegou ; Kemar, person vikel-braz a escopti Gwenet, barz Sant-Gwen-Eel ; an Abad Klec'h, bars Rugolven, Karourantin Thomas, barz an Tourtan ; Prosper Proux, e barz Kerne ; An Hégarad, barz Ploue ; I.-P.-M. Ar Scour, bars an Itron-Varia-Remengol ; F.-N. An Huel, Barz Ker-ar-Born ; Ollivier Souvestre, barz Plouian ; an abad Poulaouek, kure Landevenek, barz sant Gwenole Karis, person Plougras, barz Menebre Guernison, bars Peravela, ar re all, pere o deus gret eun niver bras a verziou a sonniou kare.

« Kanit a nezho, Breiziz, rag bea int gwerziou  
 « Gret gant skiant o kalon, ha gant gwel vad komzou,  
 « Gret in e brezonnek, mad nan e koz vrezounek,  
 « Evel a re zo kals ze brezonnek-gallek.

---

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santel.  
 Kanit gloar ha meulodi da Vam tud Breiz-Izel ;  
 Ho mam hag o Patronez, Rouanez ar bed-oll  
 Mam an dud paour ankeniet *Gwerc'hez vad Remengol.*

## I.-P. AR SCOUR.

*Barz Itroun-Varia Remengol.*

---

( Propriété de l'auteur ).